

Programmoù nevez evit kelenn ar yezhoù rannvro er skol kentañ derez :
Mantrus ! N'anavezer ket petra eo an divyezhegezh er skol !

D'ar 27 a viz Gwengolo e oa deuet war kannadig ofisiel an Deskadurezh Stad programmoù kentañ ar skol kentañ derez evit ar c'helenn divyezhek yezh rannvro-galleg hag ar c'helenn yezhoù rannvro da zibab. Hag i seblantout poellek evit ar c'helenn da zibab, dañjerus bras int evit ar c'helenn divyezhek rak diresis int ha n'anavezont ket petra eo an divyezhegezh er skol kentañ derez. (Gallout a reer o c'haout war <http://www.education.gouv.fr/bo/2007/hs9/default.htm>)

Evit gwir, ne vez sellet diouzh ar c'helenn divyezhek nemet evel un astenn d'ar c'helenn da zibab. Ar palioù zo lakaet dezhañ zo **a-enep d'ar pezh emañ ar gelennerion ha tud ar skolidi o c'hortoz**. E Stern Daveiñ Boutin Europa evit ar Yezhoù (SDBEY) e kav ar programmoù-mañ harp dezhe, sañset. An teuliad-se, bet embannet gant Kuzul Europa, a dalvez da zaveiñ dezhañ, gant gwir abeg, evit deskiñ yezhoù en Europa. Ne c'hallomp nemet stadañ e falsont an ijin zo er stern-se : mont a reer adarre gant hentoù dall an deskiñ yezhoù er Frañs.

Palioù droch

Ar parder dre eur ha live A2 SDBEY eo an daou bal zo lakaet d'ar c'helenn divyezhek gant an destenn-se.

Ne c'hall ket ar parder dre eur bezañ meizet evel ur pal kelenn. Ur stumm aozañ eo ha n'a ket ouzh an deskiñ yezhoù zoken. N'eo deuet ar meizad-se diwar preder kelenn ebet ha nozañ a ra ouzh un deskiñ hag a vefe diouzh live hag ezhommoù ar vugale.

Al live A2, war skeul SDBEY, a glot gant barregezhioù evel « **Gallout a ran ober kaozioù berr-berr ha pa ne ven ket evit kompren awalc'h, peurlvuiañ, evit delc'her gant ar pennad-kaoz** ». Ha talvezout a ra kement-se emañ ar skolidi divyezhek o vont da dremen nav bloavezh, evit ar brasañ anezhe, er skol kentañ derez evit bezañ gouest da gemer perzh er gaoz er c'hlas nemet un hanter eus o devezh-skol a-benn ar fin ? Ouzhpenn-se, m'emañ kont evel-se, penaos e c'halljent heuliañ kentelioù istor pe matematik e brezhoneg en hentennoù divyezhek er skolaj... A-hend-all emañ ar pal-se en tu-mañ d'al live tapet gant ar skolidi zo bet er skolioù divyezhek Breizh bremañ. **Mar klaskfed diswriennañ ar c'helenn divyezhek ne rafed ket er mod all.**

O lakaat da dalvezout : Gwashoc'h c'hoazh !

En destenn-se ne zeu an daveoù d'ar c'helenn divyezhek nemet diouzh ar c'helenn da zibab. Diaes eo avat keñveriañ skolidi zo bet desket ur yezh dezhe un eurvezh pe div ar sizhun gant re all o deus bevet an hanter eus o amzer-skol er yezh-se. N'eus ket a varregezhioù daveiñ evit al live A2 en destenn-se zo kaeroc'h. En astennoù evit pep yezh rannvro hec'h-unan

e reer foei war skeul SDBEY rak ne vez sellet diouzh al live A2 nemet evel mont donoc’h e gouiziegezhioù al live A1 (pal ar c’helenn da zibab), ha gant-se n’eus barregezh all ebet da dizhout. **Ur seurt A1 +** e teu al live A2 da vezañ en ur mod.

Ken treut all e oa al live A2, ho pezet soñj...

Palioù reizh evit ar c’helenn yezhoù da zibab ne c’hallont ket bezañ diouzh ur c’helenn divyezhek o lakaat gerioù evel « buanoc’h » ouzhpenn amañ hag ahont pe o c’houlen gant ar skolidi divyezhek gouzout ur c’heriaoueg ledanoc’h. Ne c’hall an divyezhegezh mont en-dro nemet ma’z a ar skolidi war skiant-prenañ gant o santimant, o skiantoù hag o spered. Da lavaret eo, ma teskont ar yezh-se **asambles gant ar galleg ha gant ur vestroni gevatal.**

Neuze, ne zle ket ar programmoù evit ar yezhoù rannvro er c’helenn divyezhek bezañ diazezet war re ar c’helenn da zibab, war re mestroni ar galleg, ne lavaromp ket. Anez da se e vo dibourvez ar skolidi divyezhek pa vint o teskiñ gouiziegezhioù ha barregezhioù nann-yezhel e-keñver o c’heneiled unyezhek. Diaes delc’her gant un hevelep kelenn m’emañ kont evel-se.

Tasmantoù ar c’helenn yezhoù a c’hiz kozh er Frañs

En un doare arroutet e krog Stern Daveiñ Boutin Europa evit ar Yezhoù en deskiñ yezhoù, un doare nevez er Frañs. Erru omp pell diouzh al listennadoù verboù direizh da zeskiñ er 6vet klas. Ennañ e komzer kentoc’h eus barregezhioù, eus delc’her kont eus ar c’henarroud, eus an divizoù hag ar redioù, eus ar strategiezhioù lakaet war droad evit kas labourioù da benn, eget eus gouiziegezhioù. An doare-mañ da zegas ar yezhoù rannvro zo diouzh diorren ar vugale, kavet e vez hennezh en

digoradur boutin d'an holl yezhoù rannvro zo kaoz dioute en astennoù da heul. P'o lenner avat (evit ar brezhoneg dreist pep tra) e kaver barregezhioù dibunet evel **un aridennad troiennoù-lavar skouer da zeskiñ**. Mestr eo ar gouiziegezhioù adarre war ar barregezhioù emzelc'her evel bezañ reaktiv pe lakaat strategiezhioù daremprediñ war droad.

Abalamour d'an holl draoù-se e c'houlenn, UGB, Unvaniezh ar Gelennerion Brezhoneg,

- **ma vo nullet an destenn-se;**
- **ma vo skrivet programmoù nevez ha difer** evit ar c'helenn da zibab (yezh ha sevenadur Breizh) eus un tu, ha re all evit ar c'helenn divyezhek galleg-brezhoneg, eus an tu all ;
- ma vo savet programmoù ar c'helenn divyezhek hag ar barregezhioù da dizhout e brezhoneg gant skolidi an hentennoù divyezhek **diouzh ar re zo da vezañ tizhet e galleg, diouzh ar barregezhioù kadarnaet gant kelc'hlizher ar 5 a viz Gwengolo 2001** (*Penaos lakaat ar c'helenn divyezhek da dalvezout ?*), hag a-benn ma ne vo ket kastizet ar skolidi en hentennoù divyezhek.

Gwenole Larvol, prezidant UGB

11.10.07